

Breman 8, ru HOCHE 35000 ROAZON

12 luv

bremañ

EVEN 1987 Niv. 69



DIWAN

AR VRETONED A UNVOUEZH !

DILENNIDI BREIZH E PARIS

DOUR BREIZH

AN NITRAT O VONT WAR GRESKIN

EUSKADI

EUSKARIZ SKARZHET

KENDER'HEL A RAJ

DIWAN

DILEURIDI AR RANNVRO

drouz kas ar Stad C'hall dirak ul lez-vern etrevroadel ha da lavarout e vefe kevellet teir skol Diwan gant skolioù India-
ned eus Amerika. Meneññ a reas ivez ar gwirioù a zo gant sevenadurioù pobloù an Unvaniezh Sovietel. Per-Yvon Tremel a gomas en anv Kevredigezh ar Vaered ha Dilennidi Brezhoneger evit pouezañ "war dalvoudegezh dibar hor yezh hag ar redi d'he c'hellemm". Simone de la Bollardière a gemeras ar gomz en anv ar c'huzul skoazell gant he c'hizidigezh : "N'eo ket ar vu-gale a zo graet evit al lezern, met al lezern evit ar vu-gale".
"Distruj ar brezhoneg a vefe gaochoù eget distruj al lezern vroadel". Yann Ber Duval a zegasas harp Kuzul Sevenadurel Breizh da stourm
DIWAN.

EUROPA HA BREIZH

Evit an dud e karg er broioù all eo Joaquim ARENAS, penn-servij kelennadurezh ar C'hatalaneg e gouarnamant Katalogna a grogas ganti. Displegañ a reas penaos e veze graet gant ar memes sistem hag hini Diwan

e bro Gatalogna evit 50 000 skoliad, 1800 klas ha 518 skol evit kas d'un divyezhegzh katalaneg-kastilhaneg. War e lerc'h e teuas Jack MACARTHUR, skosat e karg ur c'huzul evit an Deskadurezh en Highlands ha Prezidant Burev Europa ar Yezhoù Minorizet. Gant kalz diplomategezh e tisklerias "e c'hellfe ur stad kreñv evel hini Bro-C'hall ober kals muioc'h evit ar brezhoneg". An Aotrou MAHER eus bro Iwerzhon, an deus komzet evel kannad e Parlamant Europa ha Prezidant ar strollad karget eus ar yezhoù bihan. E-vitan e rank un demokratelezh bezañ barnet hervez ar plas a ro d'ar bihanniver, ha n'eo ket d'ar muiañ niver !

Da echuiñ eo dileuridi ar C'huzulioù Departamant a zo deut da harpañ Diwan : Alain GOURIOU, en anv prezidant Aodoù an Hanternoz Charles JOSSELIN, ha Jean Yves COZAN, eil-prezidant ORVOEN, deut da zifenn "ar re a ren ur stourm diasez-hini hor personelezh-hag ivez "ur sistem deskadurezh a zo mat a zo hini an da-sont-".



AR C'HUZUL RANNVRO A UNVOUEZH

War al lañs eo aet 30 bennak a zileuridi eus Diwan betek Roazon d'ar Meurzh war-lerc'h ar manifestadeg, d'an 19 a viz Mae, da c'houlenn ouz ar C'huzul Rannvro, bodet eno, mont e darempred gant Ministr ar Deskadurezh, an Aotrou MONORY. Roger Le PROHON, kuzulier rannvro P.S. eo en deus laketaet ar gaoz war gudenn Diwan, daoust da enebiezh ar Prezidant, an Ao Bourges. Met hemañ n'en deus ket gettel herzel ouz lanv an diskleriadurioù o c'houlenn e ve kavet un diskoulm d'ar gudenn : René COUANEAU (CDS), Pierre le TREUT, eil prezidant ar C'huzul, Aime KERGUERIS, MORVAN, evit an tu Dehou, Felix LEIZOUR evit ar PCF. Anzav a rankas ne oa ket deut da vat ar renkamant en doa klasket kaout gant ar stad hag e oa ret ad-
kregiñ gant al labour.



DIWAN

ER MINISTER

HAG AR C'HUZULIOU DEPARTAMANT

Tud Diwan, kerent, sko-laerien pe skoazellerien o deus graet neuze tro an departamantou da lakaat ar c'huzulioù da sevel o mouezh ivez. Mennadoù a voe kinniget d'ar 25 a viz Mae koulz gant an tu dehou (Pierre NEDELEG) hag an tu kleiz (Gilbert MONTFORT). Met war c'houlenn Jean-Yves COZAN, e tennas an tu kleiz eus e vennad kement ger a c'hellfe feukañ an tu dehou. Hag e voe votet e-giz-se a unvouezh "evit difenn sistem deskadurezh Diwan". Georges LOMBARD a zisklerias zoken e rankfe an departamant mont pelloc'h eget ar c'homoù o reiñ arc'hant ma vefe ret. An dra-se a voe graet, peogwir e penn kentañ miz Mezheven eo 500000 lur a bourvez a voe votet gant ar c'huzul evit skolioù Penn-ar-Bed.

D'an 2 a viz Mezheven eo kuzulioù departamant Aodoù an Hanternoz hag ar Morbihan o deus roet o skoazell da z-Diwan. Er Morbihan, goude m'en dije Yves Le Cabellec, Kuzulier Meur ha maer PLOUE, kemeret ar gomz, e-pad hir amzer, e brezhoneg; ar mennad kinniget en Aodoù an Hanternoz gant Per-Yvon TREMEL, ha votet ivez a-unvouezh, a c'houlenn groñs ouz ministr an deskadurezh "reiñ an tu da skolioù Diwan da gendro'hel gant ur c'helennadurezh divyezhek a dalvoudegezh". Ha ma ne vefe netra nevez, dreist-holl da heul an emgav etre dileuridi ar rannvro (Jarry, Le Prohon, Couaneau, Arselin) hag ar ministr an 2 a viz Mezheven e Paris, ez eo bet karget ar Prezidant, Charles JOSSELIN da vont e darempred gant e gendred eus an departamantou all goude ar 15 a viz Mezheven.

KUZUL SEVENADUREL : GWIRIOU MAB DEN

Diouzh e du, Emvod Meur Kuzul Sevenadurel Breizh, bodet en deus goulnnet e vefe "doujet ouz gwirioù Mab Den, war an dachenn sevenadurel e Breizh".



POUR PE TRICHIN

Louen a-walc'h e oa dileuridi ar Rannvro, Jarry, Le Prohon, Couaneau hag Arcelin da heul o emgav gant tud Minister an Deskadurezh Stad, Michel ROGER, rener Kabinet MONORY, Gwenaelle Le DREAU, BOURGEOIS ha LEGOUTTIERE. Padal ar respont roet d'an 9 a viz Mezheven e-giz ma oa prometet ne zegas netra nevez, paneve an ton a seblant digoroc'h.

Prest eo ar Minister da anzav "strivoù izili an aozadur

-se evit sevenadur Breizh". Ha ne adkaver ket an diazezoù ideologel ma oa intreret ganto lizher kentañ an Ao. LEGOUTTIERE. Kinnig a ra ar Minister, dindan blienn an Ao. ROGER, sinañ kontraoù er c'hlasoù e-lec'h ma 'a eo reiñ ar plas roet d'ar galleg". Ne resisa ket, avat, peseurt plas a vefe reizh. Ne gompren ket penaos e c'hellfe ar vu-gale bezañ divyezhek ha goulenn a ra e vefe kresket plas ar galleg e pep live.

RESPONT DA VAER KEMPER 5 EUR GALLEG AR SIZHUN

Diouzh un tu all avat, da heul un emgav gant Kuzul Skoazell Diwan Kemper, ez eo set an Aotrou BEAM, Maer Kemper e darempred gant Prezidant ar Rannvro, Yvon BOURGES ha war-ean gant An Ao. MONORY. Hemañ a c'houlennfe e vefe 5 eur galleg ar sizhun e sko.

lioù Diwan. Neuze ne vefe ket ken pell-se eus kinnigoù Diwan en en gav d'un niver keitat tost par da henezh war ar lañ derez en e hed. D'ar Minister etra da ober kinnigoù sklaer ha resis. N'eus kendiviz posubl ebet mod-all.

Goulenn a ra ouzhpenn, "ma nac'h ar Stad anzav frankia an deskadurezh ha reiñ an tu d'e gas war-raok, e vefe studiet gant ar C'huzul Rannvro, anvet gant ar bobl, ur stad

nevez a aotrefe ar skolioù Diwan da segenet vu-gale ar familioù a fell dezho un deskadurezh divyezhek modern".

DESKADUREZH

SKOLIQU DIVYEZHEK

SKOUER RANNVRO AN NORZ



N'eus ket nemet e Breizh ez eus bet krouet skolioù divyezhek e Bro ar C'hwech'kogn E Bro Flandrez ez eus ivez ur c'hant klas bennak a zo oc'h heuliañ kelennadurezh e div yezh. Arabat koulskoude huñvreal n'eo ket evit kas war-raok ar Flandrezeg, met ar preder a zo bet gant an dud e karg e Bro an Norz a dalv ar boan bezañ displeget hirroc'h. Ken kas e rofe menozioù d'ar garrdunerien a glask lazhañ hor yezh.

Er bloavezh 82 pa oa Per Maurey kentañ Ministr ar Frañs hag eñ warun-dro Prezidant Rannvro "Nord-Pas de Calais" eo bet ret da bennoù ar Rektordi hejañ o revr un tammig evit lakaat war wel Bro ar Maodiern Meur. Komprenet o deus ar pennadurezhioù penaos e oa Bro an Norz war an diskar ekonomikel met war-un-dro e oant lec'hiet met evit un adsavidigezh.

Emaint sko ouzh kalon an Europ etre Londrez-Amsterdam, ar Ruhr ha Lille. Er c'horn bro se e vez graet gant teir yezh "Veur" : Saozneg, Alamaneg ha Galleg. War un dro e tegemer poull-kalon an Europ a bep seurt tud deus ar broioù estren : Italianiz, Portugaliz, Arabiz ha Flandreziz.

An deskadurezh Vroadel, ar C'huzul Rannvro ha Kreizenn Kelaouiñ war an Divyezhegezh er Bed o deus soñjet neuze lakaat war sav ur gelennadurezh etrevroadel ha divyezhek er rannvro -Meur a abeg a oa bet lakaet en araok.

War an dachenn bedagogel: n'eus ket par d'an divyezhegezh abred evit digeriñ ar spered war ar yezhoù all. Bugale an norz a vo digoroc'h ha prest da vont da labourat pep lec'h en Europ. Aesoc'h vo dezhe deskiñ meur a yezh all maz int divyezhek ada-

lek ar skol kentañ derez.

War an dachenn sokial: aesoc'h vo da vugale an dud divroet en em silañ er gevredigezh c'hallek ha nebeutoc'h a vugale a c'hwito war o deskadurezh.

War dachenn ar micherioù: gouzout meur a yezh a zo a-bouez hag aesoc'h eo deskiñ langaj an informatik hag ar jedonizezh gant an doare spered divyezhek.

War dachenn an ekonomiezh: ma zo lusk gant an deskadurezh ha ma ra berzh e teuy an uzinoù er vro evit klask tud stummet war ar micherioù ha gouest da labourat en estrenvro.

War dachenn ar yezhoù: ober gant yezhoù nebeut implijet en Europ a zo ur binvidigezh muioc'h eget an dud voutin a zesk saozneg, alamaneg pe spagnoleg forzh penaos.

Gwelet a reer n'eus tamm c'hoant ebet gant Pennoù Bras an norz dihuñiñ ar Flandrezeg.

SKIANT

TI AR SKIANTOU

SKIANTOURIEN OUZH HO SELAUO

a vez komzet gant 50 000 bennak a dud er vro-se. Met peogwir eo bet digor dor an divyezhegezh evit an arabeg, ar portugaleg, an italianeg int bet rediet d'hen ober ivez evit ar Flandrezeg.

Ur skol zo bet dibabet da gomañs, ur skol en ur gêr a c'haol war ar vevenn: WERVICQ. 150 bugel a zesk ar Flandrezeg er skol ha digemer a ra bugale deus ar Beljik ivez. Ober a reont 21 eurvezh galleg bep sizhun ha 6 eur Flandrezeg. Ur skolaerzh deus Bro an Izelvroioù a zeu d'ober kentelioù er skol. Labour a ra en tri c'hlas CP-CE1-CE2, ar pezh a lak anezhi da labourat leun amzer er skol.

Anat eo e c'hellfe bezañ graet kement-all e Breizh hag aes tre. N'eo ket trawalc'h kaout kelennerien vale a zeu ur wech ar sizhun er c'hlas. Kentelioù bemdez a ranker kaout ha kentoc'h evit goulenñ kant dre gant brezhoneg en holl skolioù diouzh tu, goulennoep e pep ker vras deus Breizh Izel da gomañs e vefe ur skol a zegemerfe ar vugale c'hoant ganto deskiñ brezhoneg hag a benn vo leun ar skolioù-se ha bev birvidig, ur skol dre ganton ha goude-se ur skol dre ganton.

Yann ar Veleneg.



E Roazon ez eus ur gevredigezh oc'h ober war-dro imboure'h ar skiantoù ha c'hoant ganti bezañ tost ouzh an dud, d'o c'helaouiñ: Boutig ar skiantoù. Bodañ a ra kimiourien, bevoniourien, mezeien ha fizisianed, armerzhourien, ijinourien war an informatik h. a. e sell da reiñ un diskoulm skiantel d'ho kudennoù, (pep hini ac'hanoc'h, tud ti-kêr, labourerien-douar, PME, PMI, hag all...).


A-walc'h e vo deoc'h skri-vañ pe pellgomz pe dont d'hor gwelet. E ti ar gevredigezh e vo tu deoc'h ober goulennoù reus ouzh un den prest d'ho se-

laou. Goude-se e vo kavet an den arbennik a c'hello studañ ho teuliad. Gwech ebet n'ho po da c'hortoz muioc'h eget ur sizhun. D'ar mare-se e voc'h lakaet e darempred gant ur skiantour a raio war-dro ho kudenñ.

A-bep seurt goulennoù a zo bet graet abaoe m'eo bet krouet ar gevredigezh. Ar "Boutique de gestion 35" gant skoazell ar greizenn X2000/OSCR a ginnig deoc'h ur staj "Mererezh ar c'hevredigezhioù" eus an 29 a viz Even d'ar 7 a viz Gouere 1987 (degemeret evel stummadur diastal). Pellgomz it da : B.G.ROAZON - 99.65.17.46. bemdez pe X2000 99-35.11.11.

DOUR BREIZH

AN NITRAT O VONT WAR GRESKIN



Ar sifroù a ziskouez kementad an nitrat (mlg e pep litrad) e stêrioù zo hag ogleannoù dour, mat da evañ. Ar c'hementad brasañ aotreet e Bro-C'hall a zo 50 mg al litrad met skiantourien european a gav gvelloc'h 25 mg, degemeret en dev e meur a vro.

Ar c'hementad nitrat ne

c'hell mont nemet war greskiñ. Poent bras eo bezañ chalet p'emañ o tostaat eus 40 mg. E meur a stêrdachenn ez eo stad an traoù eus ar gwashañ.

Un evad diwar-benn kudennoù an dour (nitrat, fosfat, saotrezeh h.a.) a zo bet dalc'het e Sant-Brieg d'ar Yaou 4 a viz Mezheven 87.

ALAMAGN

AR SKOLIOU WALDORF

UR RUMMAD SKOLIOU ISPISIAL

Kalz e vez komzet bremañ diwar-benn ar skolioù Diwan. Marteze e vo dedennet neuze lennerien "BREMANN" o c'houzout un draig bennak diwar benn ur rummad skolioù dieub all, disheñvel-mat ivez diouzh ar skolioù ofisiel.

ha speredel war un dro, da zek-kiñ penaos en em santout mat en ho korf).

Kelennet e vez ar vugale gant an hevelep skolaer diouzh ar 1añ klas betek an 8vet (d.l. e. eus an oad a 6 vloaz betek

e Bro-Alamagn eo mestr pep "Land" war an deskadurezh).

Ur skol vras eo bremañ, gant ur mil bennak a skolidi enni.

PAL AR SKOLIOU WALDORF

Er saviad diaes m'eo hini hor bed bremañ eo pal ar skolioù Waldorf gwareziñ ha diorren an nerzhioù-krouiñ a zo gant ar bugel bihan; evit-se ec'h implijont doareoù-kelenn a zo bet ijinet ganto o-unan hag a vez gwellaet bepred. Evel -mañ, ar vugale a zo bet fiziet enno a zo desket mat ha prest da gemer perzh er vuhez kevredigezhel.

Setu perak ez eus bet lavaret e c'hellfe ar skolioù Waldorf bezañ gwelet evel an dra bouezusañ roet d'ar bed gant Bro-Alamagn e-keñver pedagogiezh, ken war dachenn an teoriennnoù hag evit an efedoù pleustrek.

B. KADORED



Krouet e oant bet e 1919 gant Rudolf STEINER (1) e Bro-Alamagn. Anavezet e vezont dindan an anv a skolioù "Waldorf", diouzh anv ul labouradeg sigarettennoù eus STUTTGART ("Waldorf-Astoria") ma voe savet ar skol gentañ evit bugale he labourerien.

Meur a skol all a zo bet savet abaoe e Bro Alamagn (2) hag e lec'h all (3).

13 vloaz); evelse n'eus ket ezhomm a levrioù-skol. Desket e vez galleg ha saozneg adalek ar bloavezh kentañ.

Renet e vez pep skol gant ar gelennerien a-stroll, ha neket gant ur rener evel er skolioù boutin. Kenlabourat start a ra ar re-mañ gant an tadoù hag ar mammoù.

SKOUER SKOL SCHORDORF

Savet eo bet ar skol-se e 1945 e-kichen ur c'hastell-kozh, 20 km eus STUTTGART. Distretre e oa neuze: ur c'helenner ha 7 bugel hepenk a oa bodet en ur c'hozh lochenig.

Brasaet ha gwellaet eo bet tamm ha tamm: implijet eo bet al liorzh hag an atant evit deskiñ al labour-douar; savet ez eus bet meur a arnodva evit ar skiantoù hag ar micherioù. Etre 1968 ha 1980 eo bet savet ar peurlvrasañ eus tiez ar skol evel m'emañ bremañ. Gant un tisavour a oa bet kelennet er skol un nebeut bloavezhioù ar-raok e oa bet graet ar raktres.

Kudennoù arc'hant a zo bet eveljust: n'eo nemet e 1960 ez eus bet arc'hant digant ar Stad (BADEN-WÜRTTEMBERG, rak



(1) Diazeour un doare prederouriezh eo bet ivez: an "antroposofiezh".

(2) E tu kornog Bro-Alamagn e-veljust, rak e tu reter anezhi n'eus nemet ur skol a-berzh stad!

(3) 250 skol "Waldorf" a zo bremañ er bed a-bezh; 90 e Bro Alamagn; 7 hepenk er Stad-C'hall (e Bro Elzas hag e-kichen Paris, dreist-holl); hini ebet e Breizh.

KELEIER

PLANTAN KAOL E LILLE

PENAOZ MONT DI ?

DESKIT BREZHONEG E PARIZ !



Ur wech ouzhpenn o deus Breizhiz Bro-Bariz abegoù da stourm a-benn difenn ar brezhoneg er gerbenn. Pep hini a oar ez eus bet kaset da benn ul labour efedus gant KBDD (Kevredigezh ar Gelennerien war ar Brezhoneg en Deskadurezh Publik) ha kement-se abaoe pevar bloaz bremañ, koulz e Pariz hag er bannlev. Aet war gresk niver ar skolidi o tremen an amrouennoù brezhonek er Vachelouriezh (50 e 1985, 102 e 1986 ha 132 ar bloaz-mañ), aet war gresk ivez niver ar gelennerien (un dek bennak hiziv an deiz). War Bariz goude ur stourm kalet e penn kentañ ar bloavezh-skol 86 ez eur-deut a-benn da lakaat ar Ministrerezh da blegañ ha da grouiñ ur post brezhonek (18 eurvezh evit Roman Tremel). Pro-metet e oa bet gant an Ao. LUC bet e karg ar yezhoù en Akademiezh Versailles evit Serj Richard abalamour d'ar goulennoù niverus. Abaoe 4 bloaz edo he-mañ oc'h ober skol vrezhonek e daou lise an Akademiezh-mañ (Jean Villar e Plaisir ha Vilgenis e Hassy), en holl, 9 eurvezh da lavarout eo, un hanter-bost.

Daoust da se ha daoust dezhañ bezañ arnoddenner er vachelouriezh, en deus Ministrerezh an Deskadurezh Gall graet e soñj kas anezhañ da blantañ kaol e Lille da gelenn ar galleg adalek miz Gwengolo 1987. Gant ar vevh !!!

Petra eo deut da vezañ ar promesaoù toull, den ne oar, dreistholl pa weler al lizher

bet kaset d'ar c'helenner: "Pour ce qui est de l'enseignement du breton dans cette académie, il fait l'objet d'une attention constante de la part des services du Ministère de l'Education Nationale."

Un taol kaer avat !! Gallout a ra al lennerien reiñ o skoazell en ur gas taolioù pellgomz forzh pegement d'an Ao LEGOUTIERE, mignon-ar-brezhoneg

anezhañ, bet skrivet gantañ ul lizher ken pilpous. Labour a zo war ar stern a-benn e lakaat da blegañ. Nnn bellgomz an Ao. LEGOUTIERE: 16-1-45.50.07.68.

Goulennit groñs ma vefe entitlet Serj RICHARD en Akademiezh Versailles gant ur servij klok e brezhoneg !

APLB/KBDD

UR SKOL NEVEZ

EVIT BUGALE DIWAN KOMMANA



D'an 30 a viz Mae eo bet digoret ti nevez skol Komana. Betek-hen e oa lojet ar skol-se e-barzh un ti kozh perc'hennet gant Park an Arvorig. Ne oa ket aes tamm ebet evit an 20 bugel hag an div skolaerez. Krouet adalek 1977 er Releg, bet eo bet o pourmen dre Veneziañ Arre da Blouneur-Menez, Gwiklan, arak en em staliañ da vat war zouaroù Komana.

Maer Komana, an Aotrou ar Sant, ha Jean-Yves Cozan, eil-prezidant Kuzul Meur Penn-ar-

Bed, o deus hetet chañs vat d'ar skol, d'ar skolidi ha d'ar skolaerezed. Jean-Yves Cozan daoust d'ar c'hudennoù a zo bremañ en deus fellet dezhañ distagañ komzoù a spi un amzer da-zont "pa veser an breizh er voutilher, o ranker stagañ an alar ouzh ar stered" emezhañ. Ha alar ouzh ar stered, er bloavezhioù da-zont, evit digoradur ur skolaer Eil Dere. A-benn ur skolaer bloaz, dija, ez eus un toullad skolidi nevez a gemero hent skol Komana.

bremañ 9

KUZUL SEVENADUREL BREIZH GWIRIOU MAB DEN

HA TOURISTELEZH SEVENADUREL



KINNIGOU NEVEZ

Met, war-un-dro, en deus fellet d'ar burev ober kinnigoù resis da lakaat er pleustr : un dibenn-sizhun-studi, bleniet gant un den a-vicher a vo aozet e miz Gwenolo 87 evit tud e karg an emsav sevenadurel da glask penaos gwellaat e zoareoù labourat hag e efedusted.

War un dachenn all, peogwir emae o tiorren muioc'h-mui an douristelezh e kinnig ar C'huzul kas war-raok an douristelezh sevenadurel evit ober an implij gwellañ eus hor sevenadur ha d'iorren anezhañ, war-un-dro : da skouer, aozañ troiad an ilizoù meur, pe troiadoù istorel, pe kinnig sizhunvezhioù staj war ar sevenadur, an dañs, ar yezh hag all...

MENNADOU DIWAN, DEUG, FR3

Mennadoù a zo bet votet a-hend-all evit difenn Diwan ha "Gwirioù sevenadurel Mab-Den", evit ma vefe krouet bremañ an DEUG brezhoneg a zo ezhomm anezhañ evit stummañ mistri hag evit klemm koulz diwar-benn diskar abadennoù brezhoneg FR3 hag an abadennoù galleg.

A-unvouezh eo bet asantet da renta-kont labour ar burev gant izili ar C'huzul a oa deuz ken niverus ar wech-mañ a-berzh an dud dilennet hag a-berzh ar c'hevredigezhioù sevenadurel.

E-giz personelezhioù sevenadurel e vo dibabet e-giz izili ar C'huzul: Andre Lavarnant, prezidant Diwan, Per Bernard, Jean-Pierre Pichard, a oa dija arak hag Erwan Moallic, eus Daoulagad Breizh evit digeriñ war ar sellet Ma klevet.

Ne vo ket kalz cheñchamantoù er burev, anvet a unvouezh :

Per DENEZ, prezidant, Gilles MORIN, prezidant ar gomision sevenadurel, Jean Louis LATOUR,

deus goulennet ouzh ar C'huzul Sevenadurel bezañ "ul lec'h eskemm, dielfennañ ha kinnig". Roet eo bet ur burev d'ar C'huzul e ti ar Rannvro hag ur yalc'had da lakaat ar sekretouriezh da vont en-dro.

Labour pleustrek ar C'huzul a vo bet, noarvat, gant animatourien sevenadurel ar vro krouiñ darempredoù etre ar Vretoned ha pobloù all. Un emvod bras, etre tud e karg Katalogna, Kembre, Skos ha Breizh diwar-benn ar sevenadur hag ar Sellet ha Klevet a oa bet aozet e Douarnenez e miz Eost 86. Da heul e vo savet ur veaj evit dileuridi Rannvro Vreizh ha Penn-ar-Bed e-pad tri devezh e Kembre hag e kemberazh perzh ar C'huzul er sizhunvezh aozet e miz Ebrel e Katalogna diwar-benn Breizh : diskouezadegoù e-vel "istor ar brezhoneg" savet gant Skol An Emsav, diskouezadeg levrioù, prezegennoù diwar-benn istor ar Vro, an ekonomiezh hag ar yezh gant Per Denez ha Tangi Louarn. Abadennoù sonevezh, kan ha dañs brav ha pri-ziet kenañ gant bagad ha kelc'h keltiek an Alre. Gortoz a reer bremañ e teufe da Vreizh d'o zro dileuridi Katalogna gant ar Prezidant, Jordi PUJOL en o fenn.

D'ar Sadorn 13 a viz Mezhveven eo bet dalc'het Emvod Meur Kuzul Sevenadurel Breizh e Roazon. Anvet doou vloaz 'zo, d'an 9 a viz Meurzh 1985, karzet e oa bet ar burev nevez da reiñ lañs en-dro d'ar C'huzul. Hanter varv e oa da heul prantad ar Chart Sevenadurel etre 1977 ha 1982 en doa krouet anezhañ. Ne oa ket bet mui bodet goude "Breujoù Sevenadurel Breizh" o doa graet ul labour ha kinnigoù talvoudus kenañ e 1983, dindan brezidantelezh an Ao. QUESNEL, eus Skol Veur Brest, met hep discoc'hoù. Sac'het e oa ar C'huzul, di-c'halloud ma oa, ha tud 'zo oc'h hetin e varv pa ne servije ket dezho ken war an dachenn bolitikel, da rastallat mouezhioù an emsav sevenadurel.

Pounner e oa neuze karg ar skipailh bodet en-dro da Ber DENEZ ar prezidant nevez. Met, hep ober re a drouz, ez eo deuz a-benn ar C'huzul da gaout ur roll fetis ha talvoudus evit sevenadur Breizh.

Kentañ tra en deus graet eo goulenn bezañ anavezet en un doare ofisiel en-dro gant ar Rannvro. Ar pezh a zo bet graet. An Aotrou Marcellin, prezidant a-neuze ar C'huzul Rannvro, en

TAOLIOU PLUENN



BRUDEREZH



SAOTREZH



prezidant komision an arc'hant, Constant HUBERT, kuzulier li-ha-gwilen, eil-prezidant, Raymond le BOSSE, kuzulier Liger-Atlantel, eil prezidant, Tangi LOUARN Skol An Emsav, eil-prezidant.

Izili all ar burev a zo : Pierre Le TREUT evit ar Rannvro, Paul HAVARD evit ar C'huzul Ekonomikel ha Sosial, Yves TOUBIN (Keper) ha Meriadeg RIVIERE (Naoned) evit ar c'hêrioù, an Aotrou MOUNIER, prezidant Skol Veur Breizh Uhel, evit ar Skolioù Meur, Pierre LEMOINE (Kuzul ar Brezhoneg), Yann-Ber KEMENER (ar Falz) ha Yann-Ber DUVAL (URBE) evit ar c'hevredigezhioù.

Fanch an Du.

STOURM DIDREVADENNIN

Kendiviz diwar-benn emsavioù KANAKY, KORSIKA, GWAADLOUP, e Lyon d'ar 27.28.29 a viz Du 1987. E-pad an tri devezh-se e vo klasket gwelet pe-seurt diazezoù boutin ha pe-seurt disheñvelderioù a zo etre stourmoù didrevadennin an teir fobl. Digor e vo d'ar re a gemer perzh er stourmoù dieubiñ er broioù-se hag ivez er c'hwec'hkorn (Breizh, Okitania, Euskadi, Katalogna hag all...)

Ur c'hasedad brav a leunian gant kazetennoù ha paperioù bruderezh a bep seurt a gavan em boest-lizhiri bep sizhun. Evel just ne lennan hini ebet anezho, ha teurel a ran pep tra. Kaer am bez skrivañ, pellgomz, ha kunujenniñ ar re a gavan o lakaat o loustoni em boest pa 'z eo skrivet "bruderezh, soatrevezh" warni, netra d'ober. Ar brezel zo etrezomp, ha n'on ket an hini kreñvañ.

E pep lec'h en dro deomp ec'h astenn ar vor-gazhenn heugus-se he favioù. Lec'h ebet ken da lakaat ho skritellig fest noz e ti ar baraez : gwerzhet en deus e werenn-straed d'ur gompagnunezh bruderezh, pe da veur a hini. Ha pa ro deoc'h moneiz ho pilhed 50 lur e vez pegsuniou bruderezh war ar pezhioù.

En davarn, dirak ho panne bier, emañ ar radio o vont en-dro gant ar findaon komz sioul gant ho kenseurt pe un durzhunell hoalus bennak ? Dibosubl. Ha bruderezh e-leizh ouzh ho pouzarif ma ne c'houlennit ket

digant an ostiz lazhañ e skin-gomz. Mar gra e tisplego deoc'h marteze e vez graet bruderezh evitañ war Radio-Rastell, gant ma vo klevet ar radio-brein-se en o di. E tiz all e kêr Roazon, eo bruderezh war ar skin-wel a weler a-hed an deiz, un tamm evel er metro e Pariz.

N'eo ket a-walc'h-se: miz zo, er memes kêr, e kinniget d'an dud feurmañ lec'h war o gweturioù da lakaat bruderezh! Ha petra c'hoazh ?

Ar studierien o vanifestiñ o trevezioù frazennoù-bruderezh en o sloganioù, ar skin-welioù nevez o skignañ forzh petra etre an tammoù bruderezh... Setu ar sevenadur nevez. Ec'h!

Gerioù, disterachoù, avel netraken, emit-hu ? Arc'hant dreist-holl, gast ! ha galloud! Dont a reont a-benn da lakaat ar yaouankizoù da gredin ez eus un "arz eus ar bruderezh" !

Prestik e larint ez eo demokrat Pasqua hag ez eus c'hwec'vat gant ar c'haoc'h ! DIWALLOMP !

gant Herve Morvan

BREZHONEG YEZH OFISIEL

Eus ar 7 d'ar 16 a viz Eost e vo GOUELIOU AN ORIENT. Paperioù bruderezh pempezehek a vez skignet gant an aozerien. TANN BREZHONEG EBET AVAT, evel boaz... Da glemm, skrivit 'ta (e brezhoneg) d'ar Festival. FESTIVAL GOUELIOU AN ORIENT, plasenn an Ti-Kêr - 56100 - AN ORIENT.



7-16
Août
August
De
Augusto
August
Augusto

CAPES

CAPES : tri den o bet degemeret er bloaz-mañ er C'HAPES brezhonek goude al lodenn dre gomz a oa bet 7 den o tremen e Pariz. François Louis, ur gwenedour, studier e Roazon, en doa tremenet saozneg ouzhpenn, Daniel Carre, ur gwenedour all, o kelenn en ur skol brevez, en doa tremenet istor ha Douaroniezh, hag Isabelle Leal, mestrez-skouzell, ha Kervadez, hag he doa tremenet galleg. Evel warlene eo an notennou en eil danvez dreist-holl o defe dispartiet ar genstriverien.

Daoust ha CAPES a vo a-benn bloaz ? Evit bremañ n'ouzer ket pet post a vo kinniget. Kaoz zo bet ne vije nemet bep daou vloaz !!

M.K.

"ASSENTAMENTOS"

HAG EZ ALOUB AN DOUR DOUAR AR GOURIEN DIZOUAR



E Bro-Vrazil, a vilionadoù ez eus kourerien dizouar o treuzvevañ sko ouzh tachennadoù bras a zouar yen hag aet da fraost. Alies e rankont kuitaat ha mont tramek ar "favelas".

Unanennoù koulskoude zo en o fenn stourm evit kaout douar. Bodadñ a reont dre "assentamentos" evit ma vo kaset a-benn an adreizhadur evit an douar hag evit gellout neuze bevañ diwar un nebeut devezhiou-arat.

+++++

Evit Rio de Janeiro da vezañ d'un nebeut leviou hent hepken gant he f-"pao de açúcar", emañ birvilh he zraezhennoù hag he c'harterioù krann pell ouzh an "assentamentos". E-barzh ar re-mañ e c'hall bezañ betek 250 tiegezh kourerien dizouar, staliet abaoe c'hwec'h mizvezh dija dirak un dachennad douar yen.

E miz Genver 86, e "tigras" an douar-se hag e voe roet ar gwir da c'honez 960 devezharat d'an 60 tiegezh bet ingallañ er stourm. Evel-se ez eus savet ganto un "assentamento" arall (e ur c'hevredad tiegezhioù o c'honez douaroù aloubet a-stroll ha dre forzh stourm evit kaout ar gwir da vezañ mistri warno).

Diwar ar maez a orin eo ar gouerien dizouar-mañ, hogen holl n'int ket bet c'hoazh labourerien douar. Nevez zo e oant, evit darn vuiañ anezho, o chom e kêr, o vezañ diwar labourioù dizingal : micherourien war ar sevel savadurioù, devezhourien, mevelien en tiez, pe gentoc'h o vezañ diwar drikamardourezh. I zo e-touez an holl re gwalldizhet gant an Ermaeziadeg.

Ur roll a vri e-diabarzh o aozadur ez eus bet gant an lliiz : ur beleg iwerzhonat en deus bet o harpet ha bet afer

gant ar melestradurioù ofisiel. D'ur Ministr ar Yec'hed a oa bet a oa an dachennad douar ma oant bremañ. Abaoe ouzhpenn pemzek vloaz e chome dic'hounnid.

Hiziv en deus Stad RIO tennet e zouaroù digant ar perc'henn-mañ, d'ar re dizouar mont en e lec'h ; rak anataat d'an holl e c'haller bevañ en "assentamentos" e venn Gouarnour ar Stad-mañ (Leonel Brizola, er Strollad Demokratel Labouradour). Setu en deus eni prometet paeañ sevel tiez evit lakaat e lec'h al lochoù plankennoù koad pe goloennoù plastik a oa betek-hen annezioù ar re "dizouar". Savet dindan un nebeut sizhunvezhiou, ez eus koulskoude tredanerezh el locheier-se ; alies. Maer ar gêr nesañ ne oa ket gouest mui da chom hep sikour hep mod ebet : paeañ a raio ur c'harr-samma d'ar re nevez-deut evit gwerzhañ o legumach.

BRO VRAZIL

150 ASSENTAMENTOS 20 000 TIEGEZH ANEZHO

Hiziv e vez gonezet darn eus an douaroù, dija. Da dra n'eo ket c'hoazh ar gouerien dizalc'h eus skoazelloù ar c'hant diavaez evit o bevañs. En ur gegin strolladel e vez aozet ar boued (pourvezet gant ar F.A.S.E. *) ; eno e teont "assentamento", e pourvezet ar gegin-mañ gant legumachoù ul liorz strolladel ivez. Hogen n'eo ket bet hirbadet, pep tiegezh zo gantañ e liorz dezhañ e-unan bremañ. Hervez an hevelep doare, e ranno ar gouerien kentrez eo douaroù chomet dic'hounid : ur c'hevredad strolladel, daoust ma c'hoanta dezhañ tegnekourien ar F.A.S.E. a vez war dro an "assentamento" n'eo ket, hervez an doare, un aozadur ret war meno ar gouerien nevez-deut-se. Padal, trapenn d'ar gorreadoù dister zo lusket da bep tiegezh (16 devezharat) trapenn d'an diouer a arc'hantoù, un aozadur kevredadeloc'h a zerefe gwel ouzh ar gounidoù bremañ hag ouzh ar re da zont evel ar manio.

anezho. Roet d'ar re dizouar e c'hallfe bezañ neuze an holl goneadoù douar-se ; ez reizh atav.

E 1978, en Nordeste, e oa eus al latifundia 77 % eus an douaroù ouzh 9 % hpeken evit ar staliou labour-douar bihanoc'h zo koulskoude ouzhpenn 67 % eus holl c'honideien ar vro-mañ eus Brazil.



rel an douar. Bodet eo an holl gevredigezhioù-se e-barzh Kuzul Broadel an Adreizhadur.

Forzh penaos e chom dister awalc'h pouez an emsaveser c'hêrioù betek-hen, ha zoken diwar ar maez ne vez ket kemeret perzh ennañ gant an holl gopridi, ganto traoù disherivel da zifenn.

Daoust ma vez herzet ouzh an assentamentos e meur a Stad, evel en Nordeste, trapenn da zoare ar politikerezh n'eo ket ken mat hag hini Stad Rio, e chomont c'hoazh an tu nemetañ evit ar gouerien dizouar da zont da vezañ perc'henn war o douar.

Dre an assentamentos e pouezer hiziv war ar galloud-stad ha war ar strolladoù politikel. Hervez an diskoulmoù teknik ha kevredigezhel a vo, e raint berzh pe get, ha ret-mat eo dezho ober berzh evit ma c'heller krediñ e dazont an adreizhadur. ■

P Kloareg ha S.Moal

KOURIEN HEP DOUAR DOUARO HEP KOUER

Ne dalvez ket an taolennadur-mañ eus an "Assentamento" sheñvel evit Bro-Vrazil holl, disheñvel eo stadou ar gonez douar ane il ouz eben e pep bro vraziliat.

E-tro 150 "assentamentos" zo bremañ e Bro Vrazil a-bezh, 20 000 tiegezh anezho. Anezho n'ez eus, da lavarout ar wirionez, hogozik netra e-skoaz ar 12 milion a gouerien dizouar pe hep douar a-walc'h zo en holl e Bro Vrazil.

Ha padal ez eus douaroù da c'honez, ken ez eus. Hervez an INCRA (*), ouzhpenn 800 mizad : douar dic'hounid evit an hanter (douar fraost) pe re vras

Goude pledañ gant an holl fedoù-mañ ne gav ket iskis mui unan ez eo feuls kenañ e Brazil ar stourmoù evit an douar ; ouzhpenn ur c'hant a dud lazhet zo bet diwarno e c'hwec'haziad kentañ 1986. E-pad mare brudezhez dilennadegoù miz Du 86 (dilennadegoù ar gannaded kevredadel, ar gannaded a stad, ar c'houarnourien) ez eus bet eus an adreizhadur evit an douar an arguzenn-benn. Hogen, termenet fall eo politikerezh pleustrek an adreizhadur, setu penaos ne vo a-barzh pell adroet a-zevri kaer an holl zouaroù dic'hounit-se.

Setu e teuer d'en em c'houlenn peseurt kempouez e vo ret kaout etre an nerzhioù kil hag an nerzhioù war-raok evit ma vo kaset an adreizhadur da benn. Emsav ar gouerien "dizouar" a zo ennañ tiegezhioù ken paour o stad ma n'o deus netra da goll. Skoazellet e vezont gant sindikadoù zo (CONTAG *), ha gant kevredigezhioù stag ouzh an lliiz, evel kuzul pasto-

FASE : kevredad ar skoazell sokial hag an deskadurezh.

CONTAG : kevredad broadel ar sindikadoù labourerien-douar.

INCRA : kevredad broadel an tredanennañ hag an adreizhadur.

BEP DAOU VIZ LENNIT

AL LANV

59, hent

KERDRONIOU VIHAN

29000 kemper

KOUMANANT BLOAZ 70eur

SKOAZELL : adalek 100 lur.

EUSKADI

EUSKARIZ SKARZHET

KENDERC'HEL A RA...



Fin miz Mae eo bet harzet daou baotr Euskadi e Breizh Olaciregui-Aizcorreta hag Alfredo Rodriguez Lambda a oa o chom e Lanvenegen (Bro Wened) e ti Klaod an Duigou. D'ar 27 a viz Mae da 7 eur mintin e oa deuet archerien Gall gant armoù da gemer an daou repud. Furchet e oa bet ganto en ti hag ivez en ti ne-sañ a zo d'an ltron an Duigou.

Degaset o doa diganto kement tra a soñje dezho a oa d'an Euskariz. An holl traoù-se hep aotre, evel-just. Ne vez rebechet netra diganto nemet bezañ o chom er Stad C'hall, pa 'z eo bet nac'het outo ar statut a repuidi.

D'an devezh war-lerc'h e oa deuet un 50 den bennak da laret da archerien ar Faouet ne oant ket a-du gant seurt doareoù. Degemeret e oa bet daou deus outo, Klaod an Duigou ha Tangi Louarn, izili eus ar c'ho-mite skoazell da Repuidi Euskadi, gant kapiten archerien bro Bondi. Respontet eo bet dezho n'o doa an archerien graet nemet heuliañ an urzhioù. Just e-giz an hini euseur o varn e Lyon er mare-mañ.

An Ao. ar Guern,maer Lanvenegen en deus disklriet ne

oa ket a-du tamm ebet gant seurt doareoù enep-demokratel war e barrez. Diouzh un tu all, kevredigezh gwirioù Mab Den, Emgann, ha Skol An Emgav a sav o mouezh evit e vefe doujet da wirioù Mab Den gant gouarnamant Gall ha paouezet gant ar skarzhaegoù.

Daou repud Euskadi all zo bet harzet e Baiona ha kaset da bolis Spagn d'an 11 a viz E-ven. Ignacio-Echaniz-Onatibia ha Begonia Clemente-Lazaro zo ar 64vet hag ar 65vet repud Euskadi kaset da Stad Spagn dibaoe ur bloaz. Kenlabour gouarnamantoù Gall ha Spagn a-enep ar stourm a frankiz renet en Euskadi a gendalc'h stankoc'h -stankañ.

POR LA RUPTURA HERRI BATASUNA

EMAN BOTUA

HB

VOTADEGOU

WAR-RAOK

Votet eo bet er Stad Spagn d'an 10 a viz Even evit ar c'hêrioù, ar "rannvroioù", ar Stad hag evit Europa. Trec'h eo bet ar vroadelourien en Euskadi. 70 % eus ar mouezhioù zo aet gant Herri Batasuna, tost da ETA Militarra; Eusko Alkartasuna hag ar PNW (strollad broadelour Euskadi) klouar a-walc'h. HB (Herri Batasuna) an hini eo a zo aet ar muiañ war-raok, an nerzh politikel kentañ bremañ e Gipuzkoa (Bro Zomesti).

Ar strolladoù Spagn, int, a gil c'hoazh. Ar PNW eo a goll ar muiañ. Un troc'h a oa bet er strollad-mañ hag e oa bet krouet er strollad nevez, Eusko Alkartasuna, gant ar re a gavedezho ne oa ket taer a-walc'h politikerezh ar PNW.

Evit Parlamant Europa, e c'houez Herri Batasuna ur gador evel Eusko Alkartasuna. Diwar disoc'hoù ken sklaer, e vo ret mat da Stad Spagn, un devezh bennak, negosiañ gant broadelourien Euskadi o tont da vezañ niverusoc'h-niverusañ ha taeroc'h-taerañ.

Dominig JOLIVET.

LIBAN

13VET BLOAVEZH BREZEL



Emiz Mae e oa deuet e Roazon, Claude SATORI, ur vaouez hag he deus bevet an 30 bloavezh diwezhañ el Libañ. Anavezet a ra mat istor ar vro-se hag he doa kontet deomp penaos he doa gwelet an traoù spontus a c'hoarvez du-hont. Roet he deus deomp c'hoant da velet a destoc'h ar pezh a vez bevet al Liban dibaoe 12 vloaz, et ur strollad nevez, Eusko Alkartasuna, gant ar re a gavedezho ne oa ket taer a-walc'h politikerezh ar PNW.

Ar brezel a zo ur spont e forzh peseurt bro e vefe. El Libañ dibaoe 1975 ez eus eus ar brezel. Kanolioù zo er ruioù o tennañ ar marv dibehan. Kirrinij o lezel bombezennoù da gouezañ kement hag e vez bouzardet an dud ne c'hloazont pe ne lazont ket. Armoù a bep bezennoù ispisial zo, a ra kement a drouz hag e c'hallont lazhañ tud hep o c'hloazañ, ar c'hallon eo a darzh... Bugale oc'h en em gannañ gant kalachnikovioù, o lazhañ... Lazhañ, ar ger-stur el Libañ dibaoe 12 vloaz.

Met perak, eta ? Betek tamm douar a vez graet al Libañ outañ. Dizalc'h eo dibaoe. E 1958 e oa bet un dispac'h o tizezañ un emglev etre ar Gristened hag ar Vusulmaned. E

1970 eo deuet Palestinianed er vro, skarzhet gant an Israelaened eus o douaroù (250 000). E 1975, eo degouezet 600 000 palestinian all o tont eus Jordania skarzhet gant Hussein. Ar Baletinianed, niverus a-walc'h el Libañ, ha c'hoant ganto adkemer o douaroù, o deus koman-set da ziazezañ ur framm armet gant ur stourm renet a-enep Israel. An Israelaened, sikouret gant Kristened zo eus al Libañ o deus respontet da dagadennoù ar Baletinianed.

D'un devezh d'egile eo tarzhet ar brezel d'an 13 a viz Ebrel 1975. Diouzh un tu ar Baletinianed gant ar Vusulmaned dre vras, ha diouzh un tu all an Israelaened gant ar Gristened dre vras. Dibaoe, avat, n'eo ket chomet an traoù ken sklaer-se. Bez 'zo brezel etre Musulmaned zo ha Baletinianed, etre Musulmaned ha Kristened... hag all...

An abeg pennañ, memestra a chom kudem ar Baletinianed. Ur bobl divroet ne soñj nemet adkemer he bro. Ur gudenn ouzhpenn a sav an deiz a hiziv eo eil rummad alouberien Israel e Palestina a en em sant er gêr.

Diskoulm ebet da vrezel al Libañ ? Keit ma ne vo ket adkavet o bro gant ar Baletinianed, sur mat ket.

OKITANIA

UN TENZOR

DIZOUERIOUS EO PEP YEZH

Evel e Breizh (e Karaez) e oa bet lidet devezh yezhoù Europa en Okitania d'an 21 a viz Meurzh 87, devezh kentañ an Nevez-Hañv. E Toloza da skouer e voe ur c'hendiviz diwarbenn "Ar skolioù (Calandretas) hag ar sevenadur okitanek er rannvro" : un 40 bennak a dud a gemeras perzh ennañ, un nebeut dilennidi en o zouez. (*)

Dedennus e c'hell bezañ evidomp-ni teurel ur sell ouzh ar pennad bruderezh a oa bet skignet gant Andriu Lagarda eus an I.E.O. ("Institut d'Estudis Occitans", da lavarout eo Skol uhel ar Studioù Okitanek) evit an devezh-se.

Setu pezh a embann Andriu Lagarda : "Ma vije ur yezh ur benveg-kelaouiñ hepken e vije a-walc'h gant unan evit ar bed a-bezh : ur saoneg (pe an esperanteg)."

Met, en tu all d'he zalvoudgezh evit eskemm mennoioù, ez eo ur yezh koula ur benveg evit kompren un traoù, ur mod da soñjal hag un doare da veizañ ar bed. Ur melezour eo eus stum-spered ha doare-bevañ ar re a ra ganti. Ale'houez hon hêrañ eo, gant tout ar c'homañ hag ar skridoù a zo bet berriet gant hon tadoù avasomp.

Un teñzor dizouerius eo pep yezh eta : ra teu ur yezh da vezañ kendalc'het pejerñ 16

AUTONOMIA L'OCCITANIA

MIGUEL DE LE...

AUTONOMIA L'OCCITANIA

PREDENATION CLARITA

D.J.

UN TEÑZOR KAZETENNOU BANNOU TRESET

DIZOQUIERS EO PEP YEZH

E BREST

bennak da vevrel ez eo ur c'holl bras evit an denelezh en he fesh !

Ha koulskoude e vez gour-drouzet, en deiz hiziv, darn vrasañ yezhoù ar bed gant sevenadurioù ar broioù pinvidikañ ha pouez o "mediaoù". Diaesoc'h c'hoazh eo saviad ar yezhoù n'int ket harpet gant un aozadur-Stad bennak, evel hor yezh-nt, an Okitaneg.

E-keñver devezh yezhoù minorelaet Europa e vo aozet meur a ouel evit an Okitaneg en hor vro. Kemar a ranko perzh enno eveljust ar re a zo tomm ouzhañ an Okitaneg hag a labour evit e savetezh, met ivez ar re a zo chalet, gant gair abeg, gant dasont ar galleg. Rak, evel m'he deus Lavaret nevez 'zo an It. Michaux-Chevry, Sekretourez Stad evit ar c'hallegielzh: "Niviziken e vo ret difenn ar yezhoù-rannvro evit difenn ar galleg".

Kentelius a-walc'h eo deomp d'an dibenn anezhañ da vezañ dic'hortoz evidomp-ni Bretoned ! Levezon al "latinitat" eo marteze a gas hor mignoned eus ar broioù Ok da vezañ ken doujus d'ar galleg. Ni brezhonegerien a vefe tuet kentoc'h d'ober gant ar saozneg evit hon darempredoù gant ar bed bras (diwar levezon hor c'hendirvi tramor ?).

A-hent-all, petra eo me-noz an Ao.Morony ? Difenn a raio en ivez "ar yezhoù rannvro evit difenn ar galleg" ?

B.Kadored

(*) Hervez ur pennad embannet war niverenn Mae/Mezheven 87 ar gelaouenn "l'Occitan", 427, Avenugad d'elz Mores 82000 MONTALBAN).



Ma teu brav an tresañ gant tud yaouank, e Brest evel e pep lec'h, e sav allies c'hoant ganto gwelout oberennou embannet. O vezañ ne vez ket dre vras o bannoù treset a live gant ar re a vez embannet er c'hazetennoù brudetañ e klask lod eus an danvez-tresourien-se sevel o c'hazetennoù o-unan.

E miz Kerzu 1979 e teue er maez da skouer kentañ niverenn ur gazetenn bannoù treset a oa ANOPHELE hec'h anv. Ur gazetenn daouviziek a oa da vezañ miziek adalek an eil niverenn. Ret e voe gortoz miz Meurzh 80 evit gellout teurel ur sell war an eil niverenn. O vezañ ne oa ket anat e teufent a-benn d'ober ar pezh o doa prometet d'o lennerien e tivizaz izili ar skipailh tresourien a rae war he zro e chomfe ANOPHELE ur gazetenn daouviziek. E miz Meurzh 1981 e kavas ar goumanterien an trede niverenn en o bouest lizhiri. A-dra sur e voent souezhet o vezout e oa deut ANOPHELE da vezañ diviszhunvezhiek. Dre ma oa anatoc'h anatañ ne vefe biken stanket an toull (pe an islonk) e kef ar gazetenn ne voe ket a bevare niverenn.

Bez e c'hellfen ober anv ivez eus ur gazetenn vrestat all a oa LA CAVE hec'h anv ha ne zeuas ket a-benn kennebeut

da zont ingal er-maez arak mont da get.

Petra bennak ma oa treset brav an darn vrasañ eus an oberennou a oa enno ne voen ket estonet o klevout ne reas ket berzh ar c'hazetennoù-se. Ne oa ket enno peurvuiñ, danvez a c'hellfe dedennañ trawalc'h a lennerien. Ne oa ket tu zoken da gavout penn da lod eus an danevelloù treset. War a hañval e treset kalz a dresourien evito o-unan.

E-doug eizhvet Gouel Pobl Vreizh, e 1982, e voe aozet un diskouezadeg bannoù treset gant un nebeud a dresourien o doa graet o soñj sevel ur gazetenn a vije bet FLOU hec'h anv. Daoust ma ne oa ket bewech gwall uhel live an tresañ e talveze an oberennou ar boan da vezañ lennet koulskoude, Gwellet e voe tud ouzhañ o lenn gant pled ha kalz anezho a gave enno peadra da zirouffennañ o dremm. Met o vezañ ma ne rastellas ket ar skipailh tresourien-se a-walc'h a wenneien dre werzhañ tikedoù-skoazell evit ma teufe er-maez an disterañ niverenn eus FLOU, ne c'heller ket gouzout hag en he dije graet ar gazetenn-se muioch a verzh eget ANOPHELE pe LA CAVE.

Daoust hag en ez eus a-walc'h a dud troet war ar bannoù treset e Brest evit ma teufe ur gazetenn a-benn da zont ingal er-maez ? Ha ma n'eus ket a-walc'h anezho hag en e vefe tu da zedennañ estregeto gant ur gazetenn a-seurt-se. Setu ar pezh am boa klasket ober en ur aliañ tresourien da sevel danevelloù treset a vefe straedoù Brest al lec'h ma tremenfent. Sur mat, da skolidi ul lise pe da bratikou un ostaleri e vije bet gwerzhet kalz skouerennou eus niverenn ur gazetenn ma vije kontet o zroioù kaer enni. Met ar c'hoant da vezañ anavezet er bed a-bezh diouzhus a reas dezho nac'hañ hen ober

gant Paol Ar Meur

LEVRIOU

Barzhonegoù

"BOITE"
Int o tañsal er sal deñval.
Krouellet mut, 'y sono a sut.
Pennoù goullo, korf a-stroñsoù.
Int o klask
(ma vefe tu !)
tommer mammel a-raok genel.
Froumadennou
e douz mampus ar sonerezh,
babigou da wilioudiñ un deiz marteze ?
Piv 'oar ?
Gwellet eo bet c'hoazh !

Annaig Renault

Setu un tañva eus un dastumadenn nevez embannet gant SKRID. Un oberenn a-vremañ oc'h heuliañ war dachenn ar varzhoniezh an erv bet boulc'het gant Kaoteriad...

"Barzhonegoù" niverenn 42 ar gelaouenn SKRID. 15 lur -



N'eo ket gwall aruz ar geustourenn gant al lennegezh vrezhonek er mare-mañ, hag ur c'halz eus al lezhoù o kont er-maez a zo anezho boued astommet pe skridoù n'int ket lennegel rik ; eñvorennoù pe skridoù kozh a vez embannet stank, er c'helaouennou lennegezh soken. Kement-se a c'halfe diskouez ez eus bet lennegezh, prouñ ez eus unan bremañ avat ne ra ket. Hogen tra ret eo al lennegezh".

Setu ar pezh a lenner e raskrid un dastumadenn dane-

vellou nevez embannet : "Kaoteriad". Cheñch penn ar vazh a glasker ober eta, en ur vroudañ danvez-skrivagnerien nevez !

Ha deut eo brav ar jou gante ! 12 danevell dishenvelmat an eil diouz eben, peadra da blijout, da feukil lod ivez marteze... Traoù bev atav ha labour kaset da benn...

Temoù zo evel an diforc'hiñ ne oa ket bet graet gante c'hoazh el lennegezh vrezhonek. Nemet ur vrizh skeudenn bennak e "Porzh an Ifern" marteze.

Digeriñ un hent setu ar pezh zo bet klasket ober... ra vo kendalc'het; a-benn Nedeleg e c'hortozer skridoù nevez. An danvez da verat a vo muntr an dro-mañ. Muioch a ditourioù a vo kavet el levr. Bec'h d'ho pluennou atav !


"Kaoteriad" embannet gant Mouladurioù Hor Yezh (ar skridoù a zo da vezañ kaset da : Mark Kerrain 50 ar Mailh 35000 Roazon)

ISTOR VREIZH EVIT AR VUGALE

Al levr-mañ a zo dishenvel diouz ar re all ! Ur mil pemp kant bennak a dud a zo bet o sevel anezhañ, gwelloc'h c'hoazh 1500 bugel eus Penn ar Bed. Bugale etre 4 ha 10 vloaz o kontañ istor o bro gant barzhoniezh... ha livioù dreist holl.

Ul levr istor Breizh eta, evit ar vugale savet gant bugale. N'eo ket anavezet istor Breizh gant ar vugale koulskoude, ne vez ket anavezet kalz gwelloc'h gant o skolaerien siwazh ! Ranket o deus bet ar vugale furchal el levrioù, sellet ouzhañ filmoù a benn sevel ul levr istor o kontañ o bro...

Gwelloc'h c'hoazh, an arc'hant o deus bet klasket int ivez. Embann ul levr gant fotoioù ha tresadennoù liv war bep pajenn a goust kêr ruz !



Ul levr leun a freskadurezh 'ta savet gant tud n'int ket istorourien na kelennerien war an istor.

Abeg a vo kavet sur mat er munud-mañ munud. N'eo ket istorel-rik a-wechoù met pardonet e vo aes-tre pa weler an doare m'eo bet savet.

Un dra zo sur ne c'hell ul levr e-giz-mañ nemet plijout d'ar vugale : tostoc'h e vezer ouzhañ bannoù treset eget ouzhañ dielloù istorel na poent e oa kompren e c'hell bezañ ur benveg dispar evit kelenn istor Breizh.

A-benn pegoulez e vo gwell ar skouerenn vrezhonek ? "Racontes-moi la Bretagne", embannet gant Skolig Al Louarn e Plouviann. Yann Pennhaleg



OALED DIWAN

HANV 1987

VAKANSOU



EVIT AR RE YAOUANK

5/18 A VIZ GOURE : kreizenn vakañsoù hollvrezhonek evit bugale brezhonegerien etre 6 ha 12 vloaz. (Priz 1600 Lur). *

26/31 A VIZ GOURE : kreizenn vakañsoù divyezhek evit bugale etre 6 ha 12 vloaz (dizoleñ ar yezh ha sevenadur Breizh dre ar c'hoari) - (priz 700 Lur). *

1/11 A VIZ EOST : kreizenn vakañsoù hollvrezhonek evit bugale etre 6 ha 12 vloaz. (priz 1300 Lur). *

2/5 A VIZ EOST : staj marc'hegan evit krennarded etre 11 ha 14 vloaz (3 eurvezh kentel bemdez). (priz 650 lur).

16/28 A VIZ EOST : kamp-hañv hollvrezhonek evit krennarded etre 12 ha 14 vloaz (kampañ war vord an god, sport ha natur, ha c'hoarioù...).*(priz 1900 Lur)

Notenn : degemer a reomp madoù vakañsoù evit ar c'hreizennoù merket gant ur steredennig).

OALED DIWAN : ☎ 98.04.07.04.



STUMDI (Stummadur Dibaouez) a zo o klask warlerc'h ur sekreetour(ez) TUC (barrek war ar c'honterezh ma 'z eus tu), ha barrek war ar brezhoneg komzet ha skrivet. Skrivañ pe pellgomz da : STUMDI - BP 22 - 29214 - Lanniliz - 98 - 04.08.31. -

VAKANSOU E KEMBRE PE E KERNE

ESKEMM TI : ti bras e Kerne-Veur, war an aod. Gweled brav war ar mor. 3 mm diouzh an drae-zhenn, plas evit 6 den. Ar berc'hennez a glask eskema an ti-mañ gant unan e Breizh evit 10 devezh a vakañsoù, 10 devezh diwezhañ miz Eost. Skrivit, e saozneg pe e galleg da : Hazel Fullerton, Sant Martin's, Looe Hill - Seaton - TORPOINT - CORNWALL - 6.B. - Breizh Veur-

ESKEMM TI : plijout a rafe deomp ober anaoudegezh gant tud a garfe ober un eskemm ti ganeomp, e-pad miz Eost er bloaz-mañ. Emañ hon ti e-kreiz ur vourc'h e-kichen BANGOR ha mezioù Eryri en Hanternoz Bro Gembre. Lec'h awalc'h a zo evit tri pe pevar den. Karout a rafemp ober un eskemm evit ur peazekteiz bennak, etre an 10 hag an 29 a viz Eost (plijout a rafe deomp kaout un ti war ar maez mar vefe posubl, ha lec'h evit daou). Ma 'z eus unan bennak a vefe dedennet gant ar c'hinnig-se, dezhañ da skrivañ din : Tim Webb -Maes Y Crugian - 76, Caean Gleivlor - Rhiwlas - BANGOR - GWYNEDD -Bro Gembre-

STAJ E TREVENEZ

Da vare Goueliou Meur "Kann al Loar" e Landerne e vo ur sizhun-vezh staj da zeskiñ brezhoneg er Minihi Levenez e Trelevenez adalek al Lun vintin, 6 a viz Gouere betek ar Sadorn 11 a viz Gouere. Skrivañ da Minihi Levenez -Trelevenez - 29220 LANDERNE - (Priz 400 lur ar staj boued ha pe 500 lur ma kemerer perzh e gouelioù Kann al Loar penn da benn.)

SKRIVAN PE PELLGOMZ BUAN da : OALED DIWAN TREGLONOU - 29214 - Lanniliz - Pellg 98.04.07.04.

Skrivañ da : AL LIAMM
16, sraed des Fours à Chaux
35400 - SAINT MALO -

Lennit al liamm

Koumanant bloaz 120 lur (studierien, tud dilabour : 100 lur)

KEMENNADENNOU

BREMEN NIVERENN 69	
MIZ MEZHEVEN 1987	
TAOLENN	
Lizhiri	2
Diwan : Ar Vretoned	3
ar-rouezh	4/5
Skolioù divyezhek e Norz	6
Bro-C'hall	7
Door Breizh	7
Ti ar skiantoù	9
Ar skolioù Waldorf	9
Plantañ kaol e Lille	9
Ur skol nevez evit Kommana	9
Kuzul Sevenadurel Breizh	10/11
Taolioù Pluenn : bruderezh	11
Ur skol "assentamentos"	12/13
Euskaziz skarzhet adarre	14
Youteg en Euskadi	14
Liban : 13 vloaz brezel	15
Okitania	16
Bannoù treset e Brest	16
Levrioù	17
Kemennadennoù	18/19
Mesk Divesk	20

Ar vaketenn gant Jill Killever, Lena Louarn, Mikael Baudu, Anna - Vari Chapalain, Nolwenn Louarn, Morwena Jerkin.

Ar pennoù gant Yann ar Veleneq Tangi Louarn, Bernez Kadored, APL B-KBDF, Herve Morvan, Fañch an Du, Fulup Kloareg ha Stefan Moal, Doming Jolivet, Noella Olier, Paol ar Meur, Yann Pennahale, Garan ar Meur, M.Kerrain, A.V. Chapalain.

Skoazell gant Noella Olier.

Luc'hskudennoù gant Lena Louarn, Jill Killever, La Vie.


rener BREMAN : Mikael BAUDU

Koumanant bloaz 120 lur (130 lur evit an estrenvro), skoazell adalek 150 lur.

MOULET E TI OSCR
35043 ROAZON

SKRIVIT E-BARZH BREMAN : evit niverenn a zeu Breizh, niverenn an Hanv (70/71), kasit ho pennoù, keleier, kemennadennoù, luc'hskudennoù a-mok al Lun 29 a viz Eost, 8, sraed Hoche - 35000 - ROAZON

NIVERENN DOUBL AN HANV.....



KENSKRIVEREZH E BREZHONEG

Marteze e plijfe deoc'h kenskrivañ e Brezhoneg, gant ur paotr pe ur plac'h evit en em vataat war ar yezh ? Neuze skrivit gant un timbr evit ar respont da : SKINGOMZ HA SKINGOMEL, 9 bis sraed St Vincent de Paul - 22000 Sant-Brieg - en ur reiñ da c'houzout an danvezioù a blij deoc'h ar muiañ komz pe skrivañ diwar o fenn hag ho oad

CHANTER WAR INIZI ARAN

Kinnig a ra an "Irish Workcamp Movement" ha "Les Compagnons Bâtisseurs" ur chanter war an inizi Aran eus an 30 a viz Even betek an 11 a viz Gouere. Digor eo ar chanter d'an lwerzhoniz, Kembreiz, Bretoned ha Galisianed a goz o yezh. Kempenn ul lec'h istorel a vo pal ar chanter. 490 lur e koust (ar veaj a zo da baeañ ouzhpenn).

Evit en em enskrivañ : Compagnons bâtisseurs - 5 rue des Immeubles Industriels - 75011 - e Paris - Pellg: 43.73.70.63.

BREZHONEGERIEN EVIT UR FILM

An Ao. Philippe de BROCA, krouer filmoù brudet, zo evit soñj da sevel ur film anvet "AR CHOQUETTES". Ne vo ket e brezhoneg, net c'hoant en deus e vefe un sergelc'h eus an XVIIIvet kantvet ha, neuze, e vefe graet gant brezhoneg nemetken gant tud ar geriadenn-lec'h ma filmer an istor.

Ezhomm en deus, neuze, da gavout tud a bep seurt oad (bigoù, bugale, krennarded, tud deuet, tud kozh) a oar brezhoneg evit bezañ annezerien ar geriadenn-se.

Troet e vo ar film e Bro-Wened hag e Lokorn, eus an 10 a viz Eost betek an 21 a viz Gwengolo. Evel-just ne vo ket

DEUT ON A-BENN DA GAVOUT UR MARC'H... MET EVET EN DEUS, DOUR NITRATET.




MESK DIVESK

GARAN AR MEUR

1 50 bloaz a zo, d'ar 7 a viz Even 1837 e wilioudas Anna SCHICKLGRUBER, plac'h dizimez e DOLLERSHEIM (Bro-Aostria). Alois e oa bet anvet ar paotr bihan nevez ganet. Pemp bloaz war-lerc'h e timezas Anna gant Johan Georg HIEDLER, un den dilabour hag e kasas Alois da di ur breur dezhañ, Johan Nepomuk. E 1887 e timezas Alois evit an eil gwech (marvet oa e wreg kentañ) gant Klara Pözl, lakaet dougerez e-keit ha ma rae war-dro ar familh. C'hwec'h bugel a zeuas war an douar eus an addemeziñ-se : an tri kentañ (Gustav, Ida hag Otto) a varvas diwar droug ar c'hroc'hennou-tag. D'an 20 a viz Ebrel 1889 e tigoras Adolf e zaoulagad. Piv eta a oa tad-kozh Adolf Hitler ? Ne oa ket Johan Georg na Johan Nepomuk ! D'ar mare ma oa bet lakaet dougerez Anna SCHLICKGRUBER e oa matezh e ti ur bourc'hiz Yuzev eus ker GRAZ, un den anvet FRANKENBERGER. Gwiriekaet eo gant al lizhiri a gasas ingal da Anna ha gant ar yalc'had a resevas ivez e-pad 14 bloaz a-berzh an den.

Adolf Hitler a roas da grediñ e oa ganet e-touez tud paour, ha marteze ne ouie ket mat orin e familh, betek 1930 d'an nebeutañ pa c'houlennas un enklask war an afer.


Perak ne vez ket brudet ar poent istor-mañ ? Setu ur yuzev ha ne c'heller ket meuliñ e Bro-Israel ? Gwir eo ma vefe komzet diwar-se er skol e vefe fallbrudet an dimeziñ. Ha gouzout a ouies, Jan-Mañ, piv eo da dad-kozh, dre just ?



Ne oa ket un den tener Alois, tad Adolf : kalz koshoc'h eget e wreg (48 ha 24), deuet e oa da vezañ ur maltouter reut ha didruez, taer kenañ, troet e oa da evañ ivez ha n'eo ket darempredoù karantez a veze e-tre an daou bried nag etrezañ hag e vugel Adolf. Fest ar vazh a veze er familh, aliesoc'h eget kustum, ar pezh a oa hervez reolennoù pedagogel an naontegvet kantved : n'eo ket ar bugel un den da vezañ doujet, ul loenig da vezañ doñvaet kentoc'h.

Magañ kasoni ouzh e dad a reas Adolf e vuhez-pad ha n'eo ket diabeg ma oa bet distrujet mik bourk DOLLERSHEIM, ha dreist holl ar vered (elec'h ma oa bet douaret e vammgozh ha ganet e dad) gant armeoù ar Wehrmacht e miz Mae 1938. Traoù euzhus ha dinatur a zo bet ijinet gant HITLER. SKiantprenet en doa dastumet en e vugaleaj.

(Pep tra tennet eus levr Alice MILLER "C'est pour ton bien. " Racines de la violence dans l'éducation de l'enfant- AUBIER 1984).



An adjuvant Barbie a zo ur c'hamalad direbech (...) Didamall eo ivez e emzalc'h koulz en e labour S.S. hag e lec'h all...". "Menel a ra disaouzan ha dizaon. Ur gwir enep komzour hag un nazi uhelmenet".


A-du eo bet mistri Barbie e 1940 (un ofiser S.S.), hag e 1947 (un ofiser amerikan). Sur e oa bet desket gantañ sentiñ mat, ha plegañ gant ar vazh ivez en e vugaleaj.

"Peurvuiañ e chome ma zud er ger, met resev a raent kala, tud a iliz dreist-holl (...). Evidon-me, e oa ur paotr a bedenn : sirius e kaven ar religion, servij a raen en iliz, hag e laren va fedennoù gant feiz. En doare ma oan bet savet gant ma zud, e oan doujus ouzh an holl dud Vras, ha dreist-holl ouzh ar re gozh-kozh, n'eus forzh peseurt stad e oa o re. Hervezon, va dever brasañ a oa sikour an dud hag asantiñ d'an urzhioù, da holl c'hoantoù ma zud, ma skolaerien, an Ao. Person, an holl dud Vras, ha zoken ar vevelien. Evidon-me e oa ar gwir ganto, forzh petra a lar-fent.

Ar reolennoù-se a zo chomet ma re abaoe..."

N'eo ket K.Barbie en deus bet skrivet-se, met Rudolf Hoess en e levr "Le commandant d'AUSCHWITZ parle" (1959).

Gant Wilhem REICH eo bet studiet emsav ar faskouriezh e Bro Alamagn, studiadennoù ha n'int ket diamzeriet er mare-mañ, pa weler Jan-Mañ o tifretañ. En e levr anvet "Psychologie de masse du fascisme" en deus dielfennet aroueziezh ar svastika, evit diskouez an efedoù a oa gant hevelep simbol war an emskiant. Setu amañ daou "svastika" a oa bet kavet, unan e bro Jordani, egile e bro India.



Gwelet e vez daou zen unanet en tresadennoù. Penaos e reas reas berzh an nazied nemet en ur vezañ harpet ouzh seurt skeudennoù a oa bras o foued war diemskiant an dud ?